

# BUEZ SANT MEEN

PATRON PLOEVEN.

Var don : *Ni ho salud, steredenn vor.*

1

Kanomp gant eur galon laouen  
Meuleudi an Autrou sant Meen ;  
Unan euz an dud santella  
Ho deuz enoret ar vro-ma.

2

Ar zervicher-ma da Zoue  
A leze dre ma tremene  
Eur c'houez ker mad a vertusiou  
Ma c'hounenze kalz eneou.

3

Nag a dud zo eet d'an envou  
O kerzet piz var he roudou !  
Var ho lerc'h heuliomb ar vertuz,  
Hag e vezimb enn env euruz.

4

Sant Meen en doa 'vit mamm ha tad  
Daou zen nobl ha kristenien vad,  
A ioa o chom 'barz e Bro-Zoz,  
Enezenn ar Zent guechall goz.

5

E troad eur blantennik karet,  
Ar jardiner a vez guelet,  
Aketuz gant he venvegou,  
O rei d'ezhi dour ha plegou.

6

Evelse an daou zen santel,  
Ho zonz ato enn ho bugel,

A zesk d'he galounik tener  
Karet dreist peb tra he Grouer.

7

Ma karfe an oll briejou  
Rei en ho zi ar seurt skoueriou,  
Nag a zent hag zentezet  
A ve neuze er bed guele !

8

Bleinet gant eur vamm hag eun tad  
Ho daou ker stard ebarz er mad,  
Ar bugelik skanv a gerze  
Enn hent euz a zervich Doue.

9

Ouz he gerent ez oa sentuz.  
Ha d'he bedennou aketuz ;  
Evel eun el euz an envou  
'Veze devot enn offisou.

10

Plijout e peb tra d'he Zoue  
A<sup>e</sup>ioa brassa c'hoant he ene :  
Evelse gant kalz evezdet  
E tioualle ouz ar pec'het.

11

Pa zeuaz enn oad e oue kasset  
D'ar skol evit beza desket ;  
'Vel ar rozenn e mesk ar fleur  
E luc'he dreist he gen-vreudeur.

12

Mez e lec'h dond d'en em c'houeza  
Oc'h en em velet ar guella,  
Ar Zant a gasse da Zoue  
An oll mirit a gement-se.

13

Ar vuez-se, leun a furnez.  
A vertuz hag a zantelez,

A rea d'an oll enn dro d'ez-han  
Ober eur stad vraz anez-han.

44

Kristenien, na kaera kentel  
D'eomb oll d'en em zerc'hel izel,  
Pa veomp meulet hag enoret,  
Pe a c'hras gant Doue karget!

45

Peur-echu gant Meen he studi,  
He dud her galv laouen d'bo zi,  
Enn esperans stard e chomje  
D'ho frealzi 'doug ho bue.

46

Mez eun. Arc'heskob, ieontr d'ez-han,  
A zo menec'h o chom gant-han ;  
Ho rên a ra oll gant furnez  
Ebarz enn hent ar zantelez.

47

Meen, oc'h en em zantout galvet  
Da guitaad he dud hag ar bed,  
A ia e kuz euz he vaner  
Evit mond da goud he ieontr ker.

48

An Arc'heskop, pa her guelaz,  
Gant daelou druz her briataz :  
Ar gredenn en doa e vije  
Eur zervicher braz da Zoue.

49

An den iaouank, a greiz kalon,  
A heul reglenn he ieontr Samson ;  
Ha goude eur bloaz tremenet  
Ez eo da vanac'h kemeret.

20

Mar d-oa devot bete neuze,  
Devotoc'h c'hoaz e oue goude ;

Eur blijadur oa he velet  
En hent ar vertuz o redet.

21

Samson, karget a levez,  
O velet ker braz santelez,  
A ro an Ursiou d'he niz ker  
'Vit konsakri corf hor Zalver.

22

Nebeudig amzer goude-ze,  
Var eun ali a berz Doue,  
An Arc'heskob a zeu da Vreiz  
Evit prezeg enn-hi ar feiz.

23

Meen, e mesk ar relijuzet,  
A zo gant he ieontr dibabet  
Da zond da skuill e Breiz-lzel  
Sklerijenn gaer an Aviel.

24

Goude beza kalz labouret  
Da gelenn mad ar Vretonet,  
Samson, gant joa, 'zo roet d'ez-ho  
Evit Arc'heskob enn ho bro.

25

Vel m'ac'h anavez ar madou  
A deu en eur vro dre 'r c'houenchou,  
E kass he niz da glask eul lec'h  
Evit sevel eur gouent menec'h.

26

« Kid, va niz, enn hano Doue,  
Klaskit d'ez-han kalz bugale,  
Me a ro d'ehoc'h galloud abad,  
Evit ho gouarn evel eun tad. »

27

Meen hag ar vandennik vihan  
A venec'h a dle mond gan -han

A zaoulin dirag he ieontr koz,  
Enn eur c'houlenn kaout he vennoz.

28

Po oent e bro Gael digouezet,  
Eun dijentil ho deuz kavet  
A ginnig d'ez-ho da breja,  
Ha gueleou da ziskuiza.

29

Meen, o velet he vadelcz,  
A ia gant-han gant levenez,  
Hag er maner en em gavet,  
Laouen-braz int digemeret.

30

Komzou Meen hag he zoareou  
A blije kement d'an Autrou  
Ma her pedaz da jom eno  
Gant e venec'h evit ato.

31

Kinnig a ra d'ez-ho sevel  
Eur gouent nevez, eb dale pell,  
Ha rei d'ar gouent-se a leve  
An douarou d'e-ho a blije.

32

Ar c'hinnig a zo kavet mad,  
Ha setu prez o labourat  
Da zavel ti, kloastr ha chapel,  
Dioc'h lavar an Abad santel.

33

Evel m'edo goall-bell an dour,  
Ha ma roe dale d'al labour,  
Meen a blant he vaz enn douar :  
Dour var he lerc'h a zinkl enn ear.

34

An dour-ze dre virakl savet  
A zo c'hoaz nerzuz o redet,

Hag a bare kalz klenvejou  
Né oa ket out-ho a louzou.

35

A veac'h ma 'z eo ar gouent savet  
M'en em gav a venec'h karget :  
Deud enn-hi a dost hag a bell,  
Var brud vad an Abad santel.

36

Judicaël, Roue Breiziz,  
Daoust d'he reng ha d'he iaouankiz,  
A c'houlenn beza kemeret  
Gant ar Zant e mesk he zenvet.

37

Ar prins, bet d'ez-han he c'houlenn,  
A gemer evit skouer sant Meen,  
Hag evel-d-han a zo euruz  
Breman enn envou gant Jezuz.

38

An Abad a ioa var eun dro  
Eun tad er gouent, eur skol er vro,  
Eur brovidans evit ar paour,  
Evit an oll eur guir zikour.

39

Eun den, gant he vestr goall-gasset,  
Dre bedenn Meen 'zo dilivret,  
Ha deud da gaoud an den santel  
Her ped da rei d'ez-han skoazel.

40

Ar mestr kriz-se gant-han klevet  
Edo he zen er gouent kuzet,  
A ia d'her c'hask enn eur doui  
Hen digasso a drein d'he di.

44

Her c'haoud a ra var he zaoulin  
O selaou an offis divin,

Ha kerkent e saill<sup>l</sup>var-n-ez-han  
Evel eur bleiz var eun oan.

42

Ar mevel kez 'zo diframmet  
Digant ar venec'h glac'haret,  
Ha stlejet, divar bouez he vleo,  
Er meaz, gozik anter-varo.

43

« Prins, eme an Abad santel,  
D'an tirant-se, hanvet Hoël,  
A-benn tri dervez c'houi'vezo  
Diskaret gant falc'h ar maro. »

44

An den difeiz, oc'h he glevet,  
Da c'hoarzin a zo dirollet ;  
Ober a ra 'bep seurt farsou,  
Divar goust Meen hag he gomzou.

45

Setu hen var-zu he vaner,  
Var eur marc'h kaer pignet seder,  
Hag o kass he vevl a drein  
A-dreuz ar vouillenn hag ar vein.

46

Doue var an hent a c'hede  
Ar fallagr, ar c'hounnaret-se ;  
Ober a ra d'he varc'h diroll  
Hag hen diskar, mac'hagnet-oll.

47

Hoël, skoet gant dorn Doue,  
Ha deud glac'har enn he ene,  
A bed an den enn deuz kannet  
Da glask Meen da zond d'he velet.

48

Sant Meen, ganthan ankounac'heet  
An dismegans var-uez-han greet,

A ia d'he goud gant daou vanac'h,  
Hag e varv etre he ziou-vreac'h.

49

Evelse, tud a Vreiz-Izel,  
E pardoune an den santel.  
Heuliomb he skouer karantezuz,  
Hag or bezo bennoz Jezuz.

50

Var douar Gaël loenedigou  
A voall zrebe an oll eastou :  
« Tec'hid, eme ar Zant d'ez-ho, »  
Hag ez ejont kuit euz ar vro.

51

Pa oue peb tra ganthan renket,  
Ha tud ar vro oll kelennet,  
An Abad a zeu enn he benn  
Mond d'ober eur valeadenn.

52

Guelet e Rou ar Pab santel,  
Guelet beziou an Ebestel  
Ha traou all a zevosion:  
Setu ar c'hoant euz he galon.

53

Enn Anjer pa'z eo erruet,  
Gant an eskob ez eo pedet  
D'ober eur brezegenn e kear:  
He zarmoun 'zo kavet dispar.

54

E tal Anjer, d'ar mare-ze,  
Eun dragon euzuz a spounte  
An dud hag an anevalet ;  
Oll ez oant mad d'ez-han da bred.

55

Dreist-oll eun introun pinvidik  
En em gave goall reuzeudik



O velet he farkou goullou :  
Teull ar zarpant a ioa enn-ho.

56

Mez o veza klevet kelou  
E rea sant Meen kalz miraklou,  
E ped anez-han da zonet  
Da laza al loen milliget.

57

An den santel, leun a druez  
Oc'h koll ha glac'har he hentez,  
A lavar, enn hano Jezuz,  
E lazo an dragon spontuz.

58

Gant he viskamanchou Abad  
Ez a dispount ha var he droad  
Da glask an aeneval fero  
Evit rei d'ez-han ar maro.

59

Tud a verve enn dro d'ez-han  
Stankoc'h eget eun hed guenan,  
E c'hoant guelec an abadenn  
E-tre an Abad hag al loen.

60

Setu hi dirag ar c'harter,  
M'ema ebarz an distrujer.  
Ar bobl a bign var eun dorgenn  
Ha sant Meen a ra eur bedenn.

61

Ar zant, he fisians e Doue,  
Beteg an toull a ia neuze :  
« Deuz, emez-han, loen milliget,  
Deuz d'am c'haoud, ma vi kastizet. »

62

An dragon, he zaou-lagad ruz,  
He c'hinou digor hag euzuz,

A deu er mez, leun a gounnar,  
He lost o skei var an douar.

63

Dre ma tosta ouz an Abad,  
Ez a russoc'h he zaou-lagad,  
E iud, e skrab, e ra lammou,  
Ken a dregern an douarou.

64

Var ar dorgenn ar zellerien  
'Zo enkrezet-oll evit Meen :  
Sonjal a ra d'eho her guelec  
Lazet, draillet ha peur-zrebet.

65

Mez ar Zant, hep tamm nec'hamant,  
A ia var eün d'ar goall zarpant,  
Enn eur rei gourc'hemenn d'ez-han  
Da zond dous evel eun oan.

66

Raktal m'en deuz an urz klevet,  
Ez eo reiz-braz en em gavet ;  
E c'hourvez e treid an Abad,  
Evel p'en de c'hoant d'ho lipad.

67

Ar Zant a laka he stol venn,  
En dro d'al loen e giz kordenn,  
Hag e teu d'he heul goustadik  
Evel ki var bouez eul lasik.

68

Ar bobl, o velet ar burzud,  
A jom mantret hag evel mud,  
Ken n'en deuz ar Zant lavaret :  
« Meulomp Doue, va mignounet ! »

69

Neuze bete bolz an envou  
E sav skiltruz ar meuleudiou :

An oll galounou a dride  
Hag an daelou puill a rede.

70

Biskoaz victor ne oue guelet  
E nep lec'h kement enoret ;  
Ioulet oant da zougen ar Zant ;  
Mez hema 'ioa krog er zarpant.

71

Hep mond pell ez oa eur ster zon ;  
Meen d'he c'haoud a vlein he zragon.  
Ar bobl var he lerc'h a vandenn  
A red enn eur gana laouen.

72

Var ribl ar ster vraz digouezet,  
Setu ar Zant da lavaret :  
« Loen fall, kerz enn dour var da benn  
Ha chom enn he greiz da vikenn. »

73

Heb enebi na dale tamm,  
Al loen er ster a ra eul lamm ;  
Leusker a ra eur iudadenn  
Hag ez a d'ar goeled soudenn.

74

Keriz Anjer, p'ho deuz klevet  
Ar burzd a zo c'hoarvezet,  
A ia da ziambroug sant Meen,  
A-leiz an hent, enn eur vandenn.

75

An introun, e doa ar glac'har  
Da velet goullo he douar,  
A ro kalounek d'an Abad  
Ar parkou chomet hep trevad.

76

Ar Zant, abars kuitaad ar vro,  
A ra sevel eur gouent var-n-ho

Pa'z eo greet, e teu enn he benn  
Peur-echui he valeadenn.

77

Mez klevet a ra he Zalver  
O lavaret d'ez-han seder :  
« Meen, c'houi 'zo eun den a galoun,  
Prestik m'ho kalvo daved-oun. »

78

P'ho deuz he gen-vreudeur klevet  
Ar c'helou kaer en deuz-hen bet,  
E pedont stard an den santel  
Da zistrei prim da vouster Gael.

79

Senti a ra oc'h an ali,  
Ha setu hen var-zu he di.  
Eno pa'z eo en em gavet,  
Ez euz mil joa oc'h he velet.

80

Uzet gant he binijennou  
Hag ive gant he labourou,  
Ar Zant en em gav hep dale  
Astennet klanv var he vele.

81

O santout eo tost he varo  
E c'halv he venec'h var he dro,  
Hag ho fed gant kalz a zaelou  
Da viret piz ho reglennou.

82

An doare fall euz ho Abad  
A ro d'he venec'h kalounad.  
Unan dreist an oll a vouele,  
Meen her c'honsol a berz Doue.

83

« Va mab, sec'hit ho taoulagad,  
Ha ne vouelit ket d'hoc'h abad :

A benn eiz dez c'houi vo galvet  
Gant Jezuz da zont d'am guelelet. »

84

Pa vel he nerz eat diganthan,  
Hag ar maro o tont d'ezhan,  
E c'houlenn he zakramanchou,  
Evit errezi an Envou.

85

Goude beza bet he c'houlenn,  
Ec'h en em ro oll d'ar bedenn,  
He zaou-lagad d'an Env savet  
Hag he zious-vrec'h var-n-han kroazet.

86

Mervel a ra prestig goude,  
Nao dervez arog miz gouere,  
Er bloaz c'houec'h cant pemp ha tri-ugent,  
Laouen evel ma varv ar zent.

87

Ar manac'h en deus konsolet  
Eiz dez goude a zo galvet  
Gant Doue da vond d'her guelelet,  
Evel m'en doa Meen lavaret.

88

Korf an Abad a oue beziet  
E Gael, hirio Sant-Meen hanvet.  
Eno kalz a belerinet  
A gav enn ho c'hlenvet iec'het.

89

Paressioniz Ploeven,  
P'hoc'h euz evit patron sant Meen,  
Pedit-hen gant fisians enn-han,  
Hag ho po sikour digant-han.

90

Evel ma'z oc'h he vugale,  
Hen ho kar ive mui a ze ;

Ne baouez en Env da c'houlenn  
Ho kuelel oll enn he gichenn.

91

Mez evit kaout an enor-ze  
E rankit servicha Doue,  
A vir galon ha gant aket,  
'Vel m'en deuz Meen he zervichet.

92

Goullo 'chomfe ho rekejou  
Ma ne gerzit var he roudou :  
Evit mont d'an Env gant Jezuz  
N'ez euz nemet hent ar vertuz.

93

Mar poaniit da heul an hent-se,  
Skoazell vraz ho pezo neuze  
Digant ho Patron binniget  
Evit mond eun deiz d'her guelel.

EVELSE BEZET GREAT.

1879.

---

---

## PEDENNOUIGOU

MAD DA LAVARET E MEUR A VARE.

**Var don ar Pedennou.**

1. — *Pa dremener eur Groaz.*

Me ho salud, o Kroaz santel,  
Var-n-hoc'h Jezuz enn eur vervel  
En deuz an Envou digoret :  
Ra vinn eno digemeret.

2. — *Pa zihuner dioc'h ar mintin.*

Etre ho taouarn, va Doue,  
Me 'n em laka korf hag ene,  
D'ober ar mad va zikourit,  
Ha dioc'h peb droug va diouallit.

3. — *Pa'z eer da gousket dioc'h an noz.*

Enn eur vont brema d'am guele  
Plijet gan-e-hoc'h, o va Doue,

Pardouni d'inn kement pec'het  
Am euz dreiz-han hoc'h offanset.

4. — *Pa vezer tentet da bec'hi.*

Va enebourien milliget  
A glask va zreina er pec'het,  
Me ho ped, Jezuz ha Mari,  
Roit d'inn sikour 'vit ho zrec'hi.

5. — *Pa'z eer d'ar pred.*

M'ho trugareka, va Doue,  
Evit ar boued a roit d'inn-me.  
Ra blijo gan-e-hoc'h va miret,  
'N eur he gemer, dioc'h peb pec'het.

6. — *Goude ar pred.*

Mil bennoz a roan, va Jezuz,  
D'ho Providans karantezus,  
E deuz d'inn-me gant largentez  
Roet em ezomm magadurez!

7. — *Pa reer eul labour benak.*

Va Jezuz, deut da vinniga  
An tamm labour a ran ama.  
Me ginnig d'e-oc'h he oll boaniou  
'Vit pinijenn d'am fec'hejou.

8. — *Pa'z eer da glevet eur brezegenn.*

Va Jezuz, roit d'inn sklerijenn  
Evit ma c'hellinn mad koumprenn  
Ar guirioneziou binniget  
A ia da veza prezeget.

9. — *Goude beza klevet eur brezegenn.*

Dre ho koumzou, o va Jezuz,  
Ra boulzo enn-on ar vertuz,  
Evel ma sav druz eur blantenn  
Hadet var ribl eur c'houerenn.

10. — *Pa'z eer en hent.*

E-pad va beach, o va Zalver,  
Bezit va nerz ha va bleiner.  
Plijet gan-e-hoc'h c'hoaz va miret  
Dioc'h pep droug ha dioc'h pep pec'het.

11. — *Evit goulenn ar c'hrass d'ober eur  
gouffession vad.*

Roit d'inn, va Jezuz, guir c'houlou

Evit anaout va fec'hejou.

Grit ma teuinn ive d'ho c'hofez

Penn-da-benn hep klask digarez.

12. — *Evit goulenn keuz d'ar pec'hejou.*

Siouaz ! siouaz ! O va Doue,

Nag a bec'hejou am euz-me !

Grit ma'm bezo guir geuz d'ez-ho,

Ha roit d'inn pardoun anezho.

13. — *P'en em gaver enn iliz  
evit an ofern.*

Bremaik soudenn, o va Zalver,

E tiskennot var an oter.

D'e-hoc'h, a unan gant an Elez,

Me ginnigo va c'harantez.

14. — *P'az eer d'an iliz n'euz forz pe da vare.*

D'hoc'h iliz me valeo joañuz

D'hoc'h adori, o va Jezuz.

Me c'houlenno ar zikourou

'Vo guella d'inn em ezommou.

15. — *Evit kinnig da Zoue he oll dervez,*

Hed an deiz-ma kement a rinn,

A zonzinn hag a c'houzanvinn,

A ginnigan d'e-hoc'h, va Jezuz,

Dre zorn ho Mamm garantezuz.

EVELSE BEZET GREAT.

Sur le rapport de M. l'abbé MORVAN, chañoine,  
nous approuvons l'impression de la *Vie de  
saint Méen.*

Quimper, 24 novembre 1879.

† D. ANSELME,

O. S. B.

*Evêque de Quimper et de Léon.*